

— 30 —

D'ar fin oll, maout ar Gallik
A guez d'an traon. maro-mik.
Ar Gall dilammet a fo
A dorr gouzoug maout ar Gô
Ha setu 'r brezellourien
O daou var an douar ien !

« Brema, avad, eme ar Gô,
Eur c'hoari all a vezo. »
« Sar da veg, eme ar Gall,
Pe me raï d'id kement all. »
Hag etrezo o daou raktal
An taoliou dorn da nijal.

« Pak hema, 'lavar ar Gô : [go ? »
Daoust ha c'hoas maout te grou-
« Pak hema 'lar ar Gall,
Gwel ha me c'hoari da fall. »
Hag evel var eun anne
Va daou zen a bigosse.

« Dal a zaou, eme ar Gô,
Va maout d'id ker a gousto ! »
« Dal a zaou eme ar Gall,
Paea 'rin va dle d'eun all. »
Hag evel gant morzoliou
En em vlounsont a daoliou.

Dao ! torret daou zant d'ar Gô,
Ar goad a red tro var dro.
Dao ! flastret e fri d'ar Gall,
Ar goad a red kement all.
Kerik mad eo bet koustet
An daou c'hloanek paour lazet.

Jobik ar Rous diwezet
Hen deus d'ezo lavaret :
« Potred ! chomit didrabaz
« Pe me ia da c'hoari 'r vaz.
« Greomp friko gant ho maouted
« Ha bezomp oll mignoned. »

Mathurin an Dall

Breizis va c'henvrois karet,
Hirio siouas me a zo koz.
Ag a bet gueach e meuz sonet
Da zansal e'n deis hag an noz.
Ha mar plij gant santez Anna
E klevor c'hoaz var an dachen.
Soun skiltruz va boumbard velen
O lakat tud hor Breiz da drida !

Me eo Mathurin an dall
Ar Boumbarder laouen
A laka'n dud da zansal
Divar va barriken :

— 31 —

Eun taol sut ! ha souden
Potred skanv d'an abaden,
Eur boum soun, ha ractal,
Potred o fringal ! gê.

Iaouank e kollis ar gueled...
An eostik, ma lavarer mad,
A gan flourroc'h e'n he gaouet
Pa vez dallet e zaou lagad :
An dall a gærik Kemperle,
E'n he lochen e ribl an dour,
Evel an eostik a zoun flour
Etre an Izol ag an Elle.

Iannik-ar-Japel, em c'hichen,
A c'hoari gant he viniou,
Dreist oll pa zun bord e veren
Evit souplad e vuzellou
Nag hen a sko, Iann va c'homper,
Gant he zounerezik lirzin
Ha d'he heul pa sko Mathurin
Eo mars guelet penaos e fringer.

Bet oun e Paris, eun devez,
O sini dirag ar Roue
Hag hen kouls ha tud e balez,
Gant ar blijadur a c'hoarze,
A c'hoarze krenv, a c'hoarze pel
Hep gallout miret da c'hoarzin
O kleva an dall Mathurin
O tistaga toniou Breis-Izel.

Malo-Korred a gear Ahez,
Kenta grenadour a Vro-C'hall,
A veritas klevet ivez
Sounerez Mathurin an dall.

— 32 —

A dost, a bell e tiredet.
Da velet patroum ar soudard
Ha da glevet mouez va bombard
O kana enor ar Vetouned.

Kals all a vije pinvidik
Ha gan-hen-me ne joum netra
Nemet izign va bombardik
Da c'hounid va zammik bara.
Mez a ze pikol fors ne rann;
Me 'zouno keit ha ma vevin
Ha deis va maro na gollin
Nemet va boumbard a va diskan.

